

PLAC'H AN OSTALERI

I

Eun deiz ma oan o vale
Hed-ha-hed an hent bras, (*diou wech*)
War vord an hent me welas eun ostaleri c'hlaz.

DISKAN :

Roum ! far la ri don-dè-no !
Ye ! Chach da c'har a-dre !...

II

Antreet en ostaluri,
Antreet da voutailhat, (*diou wech*)
Me'gleviseur paotr bihan 'n e c'havelo wilc'hat.

III

'N e gichen eur plac'h Yaouank,
Pôtrez a c'houezek vloaz, (*diou wech*)
Azezet war eur gador, hag he ziouhar e noaz.

IV

He mamm lavaras d'in-me :
— Houman ne dalv netra ! (*diou wech*)
Mont gant ar botred yaouank, setu ar pezh a ra !

V

— Na c'houi ez eo, plac'h yaouank ?
C'houi n'ho peus ket a vez (*diou wech*)
Da lammat dreist ar c'hleuziou ha c'hoari
[mesk-ha-mesk !

VI

— Ha pa oan me o c'hoari,
'Gave ket d'in oa fall, (*diou wech*)
Gant va c'hamaladezet, mont da heul ar re all.

VII

Ma karfes beza chomet
Er ger da labourat, (*diou wech*)
'VEFES KET AZE BREMAN EN TI O LUSKELLAT !

DISKAN :

Roum !... far la ri don-dè-no !
Ye !... Chach da... c'har a-dre !



Imp. Populaire, Brest